



Enez-Groe

KLASK KELEIER

Evit respont d'ar goulennoù, klask ar respontoù war ar pajennoù merket.

	Sell ouzh ar bajenn
1. Pet den zo o chom war an enezenn e-pad ar goañv ?	1
2. Perak eo ruz traezh ar Sableg Ruz ?	3
3. Gant petra e veze graet tan en oaled ?	4
4. Perak e oa bet savet mogerioù kreñv ha kreñvlec'hioù war an enezenn ?	5
5. Gant piv eo bet savet komzoù ar ganaouenn <i>Me zo ganet e-kreiz ar mor ?</i>	8
6. Gant peseurt bagoù e veze pesketaet ton gwezhall ?	7
7. Peseurt ton a veze pesketaet gant pesketourion Groe gwezhall ?	6
8. Petra eo un higenn ?	6
9. Peseurt labour a veze graet er friturioù ?	7
10. Peseurt porzh er Frañs eo an hini brasañ evit peskerezh an ton ?	7
11. Emen emañ an ti-kêr ?	2
12. Peseurt braster eo Enez Groe ?	1


Evit gellout respont gwir pe gaou, sell ouzh ar pajennoù merket.

	Gwir	Gaou	Sell ouzh ar bajenn
1. Àr Enez-Groe eo anv levr barzhonegoù Yann-Bêr Kalloc'h.			8
2. Groe zo un enezenn a zepartamant al Liger-Atlantel.			1
3. Tri c'hard eur e pad an treizh etre an Oriant ha Groe.			1
4. War-dro 20 000 den zo o chom en Enez-Groe e-pad ar goañv.			1
5. Peder skol zo e Groe.			5

Lenn skeudennoù

	Sell ouzh ar skeudennoù er bajenn
1. Pet bag pesketa an ton a oa e Groe e 1895 ?	kartenn p. 6
2. Emen emañ tour-tan Penn Men ?	2-3
3. Emen emañ Toull an Ifern ?	2-3
4. Pet gouel a oa war ar vag « dundee » ?	7
5. Petra e oa anv unan eus friturioù Groe ?	7
6. Emen e veze miret ar c'hig-hoc'h e-pad miziadoù ?	4
7. Gant peseurt binvioù e veze labouret an douar ?	4
8. Petra zo skrivet war maen-bez Yann-Bêr Kalloc'h ?	8
9. Peseurt bagoù a vez gwelet e Porzh-Tudi ?	5
10. Petra zo skrivet war monumant ar vartoloded beuzet e bered Enez-Groe ?	5

Gerioù-kroaz



1. Un tamm douar, mor tro-dro dezhañ.
2. Tapout pesked.
3. Ar skrivagner en deus skrivet *Me zo ganet e-kreiz ar mor.*
4. Un departamant eus Breizh.
5. Lec'hioù evit degemer ar bagoù.
6. Evit sklêrijennañ ar bagoù en noz.
7. Ur pesk a veze pesketaet kalz gant pesketourion Groe.
8. Pesketa eo o micher.
9. E penn al linenn-besketa.
10. Micaschiste, granat, schiste...
11. Ar Sableg Vras zo unan dioute.
12. Bleunioù mouk hag a vez kavet war an enezenn.
13. Ur blantenn bleunioù melen hag a vez kavet war an enezenn.
14. Ret eo kemer unan evit mont betek un enezenn.